

Hon Tad : hag a zo en neañ, hoc'h anv ra vo santelaet,
Ho rouantelezh degaset deomp,
Ho vennantez ra vo graet àr an douar 'vel an neañ.
Roit deomp hiriv hor bara pemdeziek,
Pardonit deomp hor pec'hedoù,
'vel ma pardonomp d'ar re o deus pec'hed doc'homp,
Ha n'hon laosket ket da gouezh en tantasion
Met hon diwallit doc'h an droug.

Ar beleg : Plijet genoc'h, Aotrou Doue,... ha distro hor Salver Jezuz-Krist :

R/ : Rak deoc'h-C'hwi, Aotrou Doue, emañ ar Rouantelezh hag ar gloar a-holl-viskoazh da virviken. Amen.

Lid ar peoc'h :

Ar beleg : Salver Jezuz-Krist... a-holl-viskoazh da virviken.

Peoc'h hor Salver a vo bepred genoc'h. **R/ : Ha get ho spered !**

Oan Doue :

Oan Doue a lam pec'hedoù ar bed : ho peet truez doc'homp ! (bis)
Roit deomp ar peoc'h !

Kent ar gomunion :

Ar beleg : Eürus ar re a zo galvet da bred santel an Oan.

Setu Oan Doue, an hini a lam pec'hed ar bed :

**R/ : Man Doue, ned on ket dign ma teet davedon,
met lârit ur ger hepken hag e vo aesaet din.**

Komunion : **Karet ho preuder, hag e vin geneoc'h.**

1 Me eo ar bara daet ag an neñv.(2w) 4 Ma chom ma c'homzoù bev ennoc'h,(2w)
Neb a gred ennon 'deus ar vuhez. Goulennit get feiz, reit e vo deoc'h.

2 C'hwi holl a zo skuizh ha sammet,(2w) 5 'Vel m'en deus an Tad ma c'haret, (2w)
Dait ha Me 'roay deoc'h nerzh ha kalon. 'Vel-se ivez em eus ho karet.

3 Dait, c'hwi a glask ar wirionez, (2w) 6 Me eo ar vuhez, ar wirionez, (2w)
Ma c'homzoù 'zo spered ha buhez. An Hent ho kaso betek an Tad.

Kan-dibenn : **Intron santez Anna, diskouezit d'ho pugale,
Diskouezit 'vel d'o zadoù douster ha karantez,
Ar ho pobl lan a feiz daet emañ a vostad,
Strewit get largantez ho krasoù, o Mamm vat.**

Hon tud kozh en hor raok, a zeuae setu gwerso,
D'hoc'h enoriñ emañ avel Rouanez ar vro,
Gouarn a ra ho chapel etre he magarioù,
Fronde bev o c'harantez, frond c'hwek o fedennoù.

Overenn da zonet : da 1ñ a viz Eost da 10e30 e chapel ar Werc'hez.

Pardon santez Anna

26 a viz Gourhelen 2021

1^{re} lenn. : Sh 44,1..15 2^{de} lenn. : He 11,1..13 Aviel : Mh 13,11..17

Kan digor :

Patronez ar Vretoned, ha Rouanez Breizh-izel,
Setu-ni e perc'hinded, stouet en ho chapel !

**Santez Anna, reit deomp ar peoc'h, get doujañs Doue,
Gouarnit bepred e pep tiegezh ar garantez.**

'Vel a-gent hon tadoù kozh, daet omp fidel bepred,
O Rouanez, da rentiñ deoc'h an enor dleet.

Ho chapel kaer ha digor a zo 'vel ur palez

A savas bro an Arvor en enor d'he Rouanez.

Rak m'hoc'h eus, e KêrAnna, dikouezet ho karantez,
Breizh a-bezh emañ a za da lâret trugarez.

A-ziàr an tron uhel e savas hon tadoù,

Gwarantit douar Breizh-Izel, gouarnit tud ha madoù.

E pep ti, lakait anfin bleuñvenn ar santelezh,

Ma chomo da virviken divlamm ho rouantelezh.

Salud d'ar bobl :

*Ar beleg : Gras hor Salver Jezuz-Krist, karantez Doue an Tad
hag unaniezh ar Spered Santel, ra vint geneoc'h-holl :*

Respont : Ha get ho spered !

Kyrie (Ordinal hervez Berthier)

Gloria : (overenn santez Anna) **Gloria In excelsis Deo ! (2 wezh) In excelsis Deo !**

Peoc'h àr an douar d'an dud karet getañ ; Ho meuliñ a reomp. Ho trugarekaat a reomp. Hoc'h adoriñ a reomp. Enor deoc'h a ganomp ha mil bennozh aveit ho kloar hep par. Aotrou Doue, Roue an neañ, Doue an Tad hollgelloudek.
Aotrou, Mab unganet, Salver Jezuz. Aotrou ha Doue, Mab an Tad. C'hwi hag a lam pec'hed ar bed, ho pet truez doc'homp. C'hwi hag a lam pec'hed ar bed, degemerit hor pedenn. C'hwi hag a zo azezet en tu dehoù d'an Tad, ho pet truez doc'homp.

Rak C'hwi hepken a zo santel. C'hwi hepken a zo Mestr. C'hwi hepken a zo uhelmeurbet, Salver Jezuz, Get ar Spered Santel, e gloar Doue an Tad. Amen !

Lennadenn gentañ : Pennad tennet a Levr Ben Sirah

Meulomp enta an dud holl-vrudet-se a oa hor gourdadoù. Bout a zo tud ha ned eus ket bet dalc'het tamm soñj ebet anezhe ; met kement-se n'eo ket lod an dud bet truezus, rak n'eo ket bet ankouaet o oberoù a reizhted. O eurvad a bado ken pell 'vel o lignez, un heritaj kaer eo o bugale. Dalc'het o deus o bugale da lezennoù an Emglev, hag o diskennidi, gras dezhe, a zo chomet fidel.

Da virviken e pado o lignez, ha biken ne vo diverchet o gloar. O c'horfoù a zo bet douaret er peoc'h, hag o anv a chom bev evit an holl rummadoù. Ar pobloù a veulo brasted o furnezh, hag ar vodadeg a embanno o melasion.

Setu komz an Aotrou Doue : **Bennozh da Zoue !**

Psalm 131 :

An Aotrou Doue a roay dezhañ tron David e dad.

Touet en deus an Aotrou da Zavid :

Ur c'hrataenn divrall ha ne dorro biken :

«Ur mab deoc'h-c'hwi, unan ag ho kwad

A lakain da roue àr ho tron.»

Rak an Aotrou Doue en deus dibabet Sion,

Ha c'hoantaet gober enni e annez :

«Setu lec'h man diskuizh da virviken,

Al lec'h am boa c'hoantaet chom ennañ.»

Eno eo e lakain nerzh David da gelidiñ ;

'Vit ma Messi em eus bevet ul lamp.

E eneberion a wiskiñ a vezh,

Met àrnezhañ e vleuñvo ar gurunenn.

Cil lennadenn : Lennadenn tennet a lizher Sant Paol d'an Hebreed Mam breder, ar feiz a zo ar feson da biaouiñ dija ar pezh a vèr engortoz anezhañ, ha da anavet gwirvoudoù na weler ket. Ya, en arbenn ag o feiz eo eh eus bet douget testoni d'ar re gozh get ar Skritur. Dre ar feiz e sentas Abraham doc'h galv Doue da vonet kuit davet ur vro grataet dezhañ en heritaj. Hag e yas en hent hep gouiet d'e-men e yae. Dre ar feiz e teuas da chom 'vel un estrañjour en douar grataet, en ur vevañ dindan teltennoù, 'vel Izaak ha Iakob, kenheriterion an hevelep grataenn. Rak gortoz a rae ar gêr diazezet àr gwir fondizion, ar gêr ijinet ha savet get Doue eñ-memp.

Dre ar feiz, Sarah, hi ivez, na bout ma oa kozh, a resevas ar gelloud da gonsev ur mab, rak ma kredas e gwirionez komzoù Doue en doa er grataet dezhi. Hag 'vel-se, ag un den hepken, hag eñ dija sammet get ar gozhni, e voe ganet rummadoù tud ken stank hag ar stered en neañv ha grouann an traezh àr ribl ar mor na oui den ebet an niver anezhe. Er feiz emaint marvet an holl anezhe, hep bout resevet ar pezh a oa bet grataet dezhe ; er gwelet o devoe koulskoude, hag er saludet a ziabell.

Setu komz an Aotrou Doue : **Bennozh da Zoue !**

Allelouia :

*Leun ag ar Spered Santel, Anna a servije Doue noz ha deiz,
hag a c'hortoze ar gonfortañs da zonet 'veit pobl Izrael*

Ar beleg : *An Aotrou Doue genoc'h : Ha get ho spered.*

Ar beleg : *Lennadenn ag an Aviel santel hervez St Mazhev.*

Ar bobl : **Gloar deoc'h-Chwi, o Aotrou Krist !**

Aviel : Jezus a lâre d'e zisiplad : «Deoc'h-c'hwi emañ roet da anaviñ misterioù Rouantelezh an neañv. Eürus ho taoulagad pa welont, ho tivskouarn pa glevont. Gwir eo, m'el lar deoc'h, nag a brofeted, nag a dud just o deus c'hoantatet gwelet ar pezh a welit, ha n'o deus ket er gwelet, klevet ar pezh a glevit, ha n'o deus ket er c'hlevet.»

En dibenn : ar beleg : Setu Komz an Aotrou :

R/ : Meuleudi deoc'h, o Aotrou Krist !

Kredo : Credo in unum Deum. Patrem omnipotentem, factorem caeli et terrae, visibilibus omnium et invisibilibus. **Et in unum Dominum Jesum Christum, Filium Dei unigenitum.** Et ex Patre natum ante omnia saecula. **Deum de Deo, Lumen de Lumine, Deum verum de Deo vero.** Genitum non factum consubstantialem Patri, per quem omnia facta sunt. **Qui propter nos homines et propter nostram salutem descendit de caelis.** Et incarnatus est de Spiritu Sancto ex Maria Virgine, et HOMO FACTUS EST. **Crucifixus etiam pro nobis sub Pontio Pilato, passus et sepultus est.** Et resurrexit tertia die secundum scripturas. **Et ascendit in caelum, sedet ad dexteram Patris.** Et iterum venturus est cum gloria judicare vivos et mortuos, cujus regni non erit finis. **Et in Spiritum Sanctum, Dominum et vivificantem, qui ex patre Filioque procedit.** Qui cum Patre et Filio simul adoratur et conglorificatur, qui locutus est per prophetas. **Et unam sanctam catholicam, et apostolicam Ecclesiam.** Confiteor unum baptisma, in remissionem peccatorum. **Et exspecto resurrectionem mortuorum.** Et vitam venturi saeculi. **Amen !**

Pedenn hollbedel :

Aotrou, hon Doue, o Tad Santel, selaouit hor pedenn !

Lid ar profoù : ar beleg : *Pedit, mam breudeur, ma plijo get Doue an Tad holl-gelloudek degemer ma sakrifis a zo ivez ho hani-c'hwi :*

R/ : Plijet get Doue en degemer ag ho taouarn, aveit e c'hloar hag e veuleudi, aveit hor mad-ni hag hani an Iliz.

Prefas :

Ar beleg : An Aotrou Doue genoc'h :

R/ : Ha get ho spered !

Ar beleg : Hor c'halon d'an uhel :

R/ : Emañ troet trema Doue !

Ar beleg : Trugarekaomp hon Aotrou Doue :

R/ : Just ha santel eo !

Santel :

Santel ! Santel ! Santel ! An Aotrou Doue, Mestr an ne hag an douar !

Lan eo get ho kloar an neñv hag an douar : **Hosanna e lein an ne !**

Ra vo benniget an hani a za e anv an Aotrou Doue : **Hosanna e lein an ne !**

Gorreoù :

Gloar Deoc'h-C'hwi marv àr ar groaz ! Gloar deoc'h-C'hwi, Jezus !

Adsavet leun a vuhez, hon Salver !

Hag hon Doue, C'hwi 'zeuay en-dro, Splanner lugernus !

Setu-ni àr-sav doc'h ho kortoz !